

PRÉD OR ZALVER

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg

Kan ha diskan : Unan

An oll

♩ ≈ 100

Unan

An oll

- | | |
|--|--|
| 1. Eur préd ho-peus deom kinniget, (2w.)
'Vid ma kresko ar peoc'h er béd Jezuz, o Mab Doue !
'Vid ma kresko ar peoc'h er béd, Jezuz! | 5. Gand karantez ha lealded, (2w.)
C'hwi 'peus e-kreiz an oll bevet Jezuz, o Mab Doue !
C'hwi 'peus e-kreiz an oll bevet, Jezuz! |
| 2. Bara an dén 'peus kemeret, (2w.)
'Vid chom ganeom bemdez, bepred Jezuz, o Mab Doue !
'Vid chom ganeom bemdez, bepred, Jezuz! | 6. War ho roudou ez-om galvet ; (2w.)
Heb ho skoazell ez-om kollet Jezuz, o Mab Doue !
Heb ho skoazell ez-om kollet, Jezuz! |
| 3. Pa 'z-om maget gand ho Spered, (2w.)
'Vel gwir vreudeur, 'red 'n em gared Jezuz, o Mab Doue !
'Vel gwir vreudeur, 'red 'n em gared , Jezuz! | 7. Pep tra on-eus-ni resevet, (2w.)
Etre breudeur, ra vo rannet Jezuz, o Mab Doue !
Etre breudeur, ra vo rannet , Jezuz! |
| 4. Dizammit ar re hualet, (2w.)
Mirit ar gwir heb nec'h e-béd Jezuz, o Mab Doue !
Mirit ar gwir heb nec'h e-béd, Jezuz! | 8. Préd ar joa on-eus tañveet, (2w.)
En or buez, ra vo gwelet Jezuz, o Mab Doue !
En or buez, ra vo gwelet , Jezuz! |

REPAS DE NOTRE SEIGNEUR

1. Tu nous as proposé un repas, Pour que grandisse la paix dans le monde. Jésus, O Fils de Dieu! Pour que grandisse la paix dans le monde, Jésus.
2. Tu as pris le pain de l'homme, Pour demeurer avec nous chaque jour, toujours...
3. Puisque nous sommes nourris par ton Esprit, Comme de vrais frères, nous devons nous aimer...
4. Décharger ceux qui sont entravés, Garder la vérité sans la moindre inquiétude...
5. Avec amour et loyauté, Tu as vécu au milieu de tous...
6. Nous sommes appelés à te suivre; Sans ton aide nous sommes perdus...
7. Tout ce que nous avons reçu, Qu'entre frères ce soit partagé...
8. Nous avons goûté au repas de la joie, Que cela se voit dans notre vie...